

**Kuzul skoazell Michel FRANÇOIS
3, Straed Harouys 44000 NAONED**

GALV

**da gemer perzh e Naoned, d'ar sadorn 23 a viz Meurzh,
er BALEADEG SKOAZELL
d'ar yun enebñ kroget d'ar 1añ a viz Meurzh gant
Michel FRANÇOIS,**

Kadoriad Kevredigezh ar Gerent Skolidi e Liger-Atlantel evit Kelenn ar brezhoneg (APEEB-44).

Michel FRANÇOIS, Kadoriad an APEEB 44 ha kuzulier-kêr en Naoned, en deus kroget ur yun-enebñ ar 1añ a viz Meurzh evit ma vo krouet postoù kelennerien brezhoneg e Liger-Atlantel, ma n'eus bremañ c'hoazh HINI EBET, en desped da c'houlennoù hag adc'houlennoù niverus a-berzh ar familhoù hag a-berzh ar skolidi o-unan (1).

Hiziv deiz ar pennad-mañ, n'eus bet araokadenn ebet c'hoazh.

Ar skoazell tro-dro a zo bras hag e teu eus tud a bep tu. Dont a ra war vrasaat e Breizh a-bezh hag pelloc'h c'hoazh. Met ret-mat eo reñ pouez d'ar stourm-se e stradoù kêr Naoned.

**Ar c'huzul skoazell da vMichel FRANÇOIS a ginnig deoc'h da
gemer perzh er BALEADEG SKOAZELL a vo d'an 23 a viz Meurzh,
war an tem: AR BREZHONEG ER SKOL: UR GWIR EVIT HOR
BUGALE.**

Ar BALEADEG SKOAZELL a vo e kreiz NAONED. Krog a ralo da 3 eur G.M., a-dreñv d'an Iliz-Veur (Plasenn Loeiz XVI, pe plasenn Foch, an hevelep hini eo), 200 m pell diouzh Kastell Duked Breizh, ha 5 mn. war droad diouzh an T1-Gar.

Evit ar berzhidi a zeuio gant o c'hirri eus pell diouzh an Naoned, tu a zo dezho lezel o c'hirri e-kichen stad ar Beaujoire, e gwalam ar gêr, ha mont betek kreiz-kêr gant an tram, diskenn en harzhlec'h Duchesse-Anne (e-kichen ar c'hastell).

Luganloù, panelloù hag all: evit ma kendalc'h an dud da chom tomm ouzh menozioù ha doare-ober Michel FRANÇOIS, ret e vo d'ar panelloù bezañ skrivet warno nemet anvloù ar strolladoù a gemer perzh hag, e galleg pe e brezhoneg, tem ar baleadeg. Araokadennoù all a vo ma vo graet taol-kaer gant ar baleadeg-se.

(1) 19 eur brezhoneg a zo bep sizhun, graet gant ur mestr-skoazell hag ur c'helenner a-youl-vat, evit war-dro kant skoliad, ha pa'z eo bet diskouezet gant an APEEB ez eus da nebeutañ dek gwech muioc'h a skolidi a c'houlenn brezhoneg.

A-benn disadorn !

Comité de soutien à Michel FRANCOIS
3 rue Harouys, 44000 NANTES

APPEL

à participer à Nantes, le samedi 23 mars, 1991

à la MARCHÉ DE SOUTIEN

à la grève de la faim entamée le 1er mars par

Michel FRANCOIS,

président de l'Association de Parents d'Elèves de Loire-Atlantique pour l'Enseignement du Breton (APEEB-44).

Michel FRANCOIS, président de l'APEEB-44 et conseiller municipal de Nantes, a entamé le 1er mars une grève de la faim pour obtenir la création de postes d'enseignants de breton en Loire-Atlantique, où il n'en existe actuellement AUCUN, malgré des demandes nombreuses et répétées des familles et des élèves (1).

A la date de cette circulaire, aucune avancée significative n'est encore intervenue.

Le soutien local est important dans toutes les couches de l'opinion. Il s'étend rapidement dans toute la Bretagne et au-delà. Mais il est capital de lui donner rapidement une expression massive dans les rues de Nantes.

Le Comité de soutien à Michel FRANCOIS vous propose de participer à la MARCHÉ DE SOUTIEN du 23 mars prochain, sur le thème : LE BRETON A L'ECOLE, UN DROIT POUR NOS ENFANTS.

La MARCHÉ DE SOUTIEN se déroulera dans le centre de NANTES. Le rassemblement est fixé à 15h, derrière la cathédrale de Nantes (place Louis XVI ou place Foch, c'est la même), à 200 m du Château des Ducs de Bretagne, et à 5 mn à pied de la gare SNCF.

Pour les participants extérieurs à Nantes qui viendront en voiture, les problèmes de stationnement peuvent être évités en utilisant le parking du stade de la Beaujoire, au nord-est de la ville, et en prenant le tramway jusqu'à la station Duchesse-Anne (près du Château).

Pancartes, banderoles, etc... : pour conserver à la démarche de Michel FRANCOIS la très large adhésion de l'opinion que lui vaut aujourd'hui son caractère clair et mesuré, le Comité de soutien insiste pour que pancartes et banderoles ne comportent que l'indication des groupes participants ou reprennent uniquement, en français ou en breton, le thème de la Marche. Le succès de cette démarche ouvrira la voie à d'autres progrès.

(1): il existe actuellement 19h hebdomadaires de breton, assurées par un maître auxiliaire et un professeur volontaire, pour une centaine d'élèves, alors que la demande évaluée par une enquête de l'APEEB est au moins dix fois plus importante en nombre d'élèves.

A samedi !